



Ar Zoudard yaouank

I

Var tón : Chetu me digouet, ma mignon.

'Newe falc'het 'oa ar prajou,
Ha dre-holl, ebars ar parkou,
Ann tamoez, pouner ha melenn,
D'ann douar a blege o fenn.

Ar glao 'oa kouet war ann douar,
Ann heaul a oa sklezer ha klouar,
Ha goude nec'h ha dienez,
Al labourer, gant levenez,

'Lâre : « Doue ra vô meulet !
« Ma foanio na vont ket kollet ;
« Ma zegal, ma gwiniz zo mad,
« Gwir blijadur ann daoulagad !
« Warc'hoaz-veure ar mederrienn
« Aozo labour d'ann dornerrrienn ;
« Ho falz 'n ho dorn e vont gwelet
« Dre-holl ebars ar parko ed :
« Hag ann tamoez, leun ha meleun,
« War-lein ann irwi, peno-da-benn,
« A goueo neuze war ho lerc'h,
« Segal ha heiz, gwiniz ha kerc'h !
« Na glewan kén brud a vrezell,
« Ar peuc'h a zo, hag a vô pell ;
« Ra vô eta meulet Doue,
« Ha meulet iwe hor Roue ! »

'Vel-se 'komze al labourer,
Leun a fizianz ha dibreder.....
War-du Bro-C'hall potr Breiz-Izel
A glew neuze : — Brezel! brezel!!!

Hag e choum 'n he zao, souezet :
« Petra?... n'am euz ket drouk-klewet? »
Hag e selaou c'hoaz, ha tro-dro
E klew : — Brezel! goad ha maro!!!

— « Da biou 'walbedet er giz-ze?
« Lâret; — d'ar Zaozon marteze?
— « Narn, nann! d'ar Prusianed fall,
« Pere 'zo kiriek d'ann holl gwall. »

— « Ha petra c'houlennont neuze?
« Lâret, — petra 'fell d'ann dut-ze?
— « Gwaska ar Franz ha Breiz-Izel,
« Hag ober d'imp noaz ha brezel;

« Hon izellâd dirag ar bed,
« Gwelet hon enor mastaret...
— « Petra, petra hoc'h eûz lâret?
« Gwelet hon enor mastaret!

« Ah! malloz ruz war-n-he neuze!
« Kerzomp holl eneb ann dud-ze,
« Savomp holl 'wid difenn hor bro,
« Brezel d'ar Prus, bet' ar maro!

« Ha n'ho pet ket aoun da verwel
« 'Wit ar Franz ha 'wit Breiz-Izel;
« Merwel wit ar gwir hag ar vro,
« Penoz kavoud kaeroc'h maro?

« War-zao! war-zao! potred-vad Breiz;
« Kerzet gant kalon ha gant feiz,
« Em gannet e vel Bretoned,
« Doue 'zo gant ar Franz bepred! »

Ha martoloded, soudarded,
'Dremene, hep paoues a-bed,
Dre hor bourko hag hor c'herio,
O kana zonio ha gwerzio.

Ia, holl e kanent dre 'n hentjo,
Hag ar parko hag ar c'hoajo.
'Wit kementze, na gredet ket
Penez ec'h ent hep keun a-bed;

Na gredet ket 'oa hep glac'har,
Hag hep ur rann-galcn dispar
'Tilezent kement a garent,
Ho zad, ho mam, ho holl gerent;

Ho mignoned hag ho dous koant,
(Ho flijadures, ho holl c'hoant),
Ho c'herig hag he dour huel,
Ha dreist-holl ho bro Breiz-Izel.

Gwalc'h ho c'halon ho deùz goelet,
Digant-he p'ho deùz kimiadet :
Met tremenet eo ann amzer,
Hag na zonzont met 'n ho dever :

Emganna 'vel gwir Vretoned,
Frotta stard ar Prusianed,
Ha merwel hep klemm, mar be red,
'Wit ar re 'zo er gèr chommet. —

Ha war ann hentjo, penn-da-benn,
Ha dre ar parko ed melenn,
Dre-holl, 'làre d'he ar wazed :
— « Doue ra vô ganoc'h, potred! »

Ar merc'hed iaouank ho zelle
Truezuz, ha darn a oele,
Ha digant-hè e c'houlennent,
Gant karante, pa dremeuent : —

II

— Soudard iaouank, lavar d'in-me
« Ker kalounek pelec'h ez-te? »

— « Da emganna, duhont, pell, pell,
« 'Wit Doue ha 'wit Breiz-Izell. »

— « Doue eta ra vinnigo,
« O soudard iaouank, da armo! »

— « Soudard iaouank , lavar d'in-me
« Ker kalounek pelec'h ez-te? »

— « Da emganna ewit ar gwir
« Hag ar bopl, gant ma c'hleze dir. »

— « Doue eta ra vinnigo,
« O soudard iaouank, da armo! »

— « Soudard iaouank , lavar d'in-me
« Ker kalounek pelec'h ez-te? »

— « Da emganna 'wit ar re zo
« Gwasket ha mac'het en ho bro. »

— « Doue eta ra vinnigo,
« O soudard iaouank, da armo! »

— « Soudard iaouank , lavar d'in-me
« Ker kalounek pelec'h ez-te? »

— « Da emganna, wit na vô ket
« Ann oann gwenn gant ar bleiz taget. »

— « Doue eta ra vinnigo,
« O soudard iaouank, da armo! »

— « Soudard iaouank , lavar d'in-me
« Ker kalounek pelec'h ez-te? »

— « Da emganna 'wit en he di
« E c'hourc'hemenno pep-hini. »

— « Doue eta ra vinnig,
« O soudard iaouank, da armo! »

— « Soudard iaouank , lavar d'in-me
« Ker kalounek pelec'h ez-te? »

— « Da emganna 'wit na vô ket
« Ar mab digant ann tad lemet. »

— Doue eta ra vinnigo,
« O soudard iaouank, da armo! »

— « Soudard iaouank , lavar d'in-me
« Ker kalounek pelec'h ez-te? »

— « Da emganna 'wit gant glac'har
« Na dilezo ar breur he c'hoar. »

— « Doue eta ra vinnigo,
« O soudard iaouank, da armo! »

— « Soudard iaouank, lavar d'in-me
« Ker kalounek pelec'h ez-te? »

— « Da emganna 'wit ma tebro
« Pep-hini en peuc'h, en he vro :
« 'Wit d'ar bugel a c'houl' bara
« Na lâro ann tad : N'eüz netra! »

— « Doue eta ra vinnigo,
« O soudard iaouank da armo! »

— « Soudard iaouank, lavar d'in-me
« Ker kalounek pelec'h ez-te? »

— « Da emganna 'wit na vô ket
« Ar paour hep he lod war ar bed. »

— « Doue eta ra vinnigo,
« O soudard iaouank, da armo! »

— « Soudard iaouank, lavar d'in-me
« Ker kalounek pelec'h ez-te? »

— « D'emganna 'wit en tiegez
« 'Vô peadra, peuc'h, levenez. »

— « Doue eta ra vinnigo,
« O soudard iaouank da armo! »

— « Soudard iaouank, lavar d'in-me
« Ker kalounek pelec'h ez-te? »

— « Da emganna 'wit ar paour kez
« 'Zo er prison, en dienez. »

— « Doue eta ra vinnigo,
« O soudard iaouank, da armo! »

— « Soudard iaouank, lavar d'in-me
« Ker kalounek pelec'h ez-te? »

— « Da emganna 'wit ma vô
« Breudeur ann holl dut en pep-bro. »

— « Doue eta ra vinnigo
« O soudard iaouank, da armo! »

— « Soudard iaouank, lavar d'in-me
« Ker kalounek pelec'h ez-te? »
— « Da emganna 'wit m'hen defo
« Er bed-ma, pep-hini he vro ;
« Ha bars ann env he wir Roue,
« Leûn a garantez, — he Doue ! »
— « Doue eta ra vinnigo.
« O soudard iaouank, da armo ! »

F.-M. ANN HUEL.

Plouaret, 22 gouere 1870.



Bugale Breiz-Izell

War don gallek ar *Marseillaise*

Redomp bugale Breiz-Izell,
Redomp buhan oll ha vagad,
Ia, redomp hirio d'ar vrezell,
Ne glevit ket trouz ann argad. (*bis*)
Ann devez a zo n'eur gaved
Ma zeu c'hoaz honn enebourien,
Ag inn stankoc'h evit merrien
N'eur iouall goaleur d'hor c'haved.

Kemeromp ann armou

A zouge hor zadou,

D'ha vonn (*bis*)

Holl varneze

Eb kaout aon bugale.

O pebeuz devez eo eman!
Honn enebourien ha dosta,
Evel-ze bugale breman
Skoomp war n'he eb marc'hata. (*bis*)
Hirio tennomp holl hor c'hleze
Hor breudeur zo deuz hor guervel,
Holl he meinn ho vonn d'ha vervel,
Ho vonn d'ha vervel, marteze!

Kemeromp ann armou
A zouge hor zadou,
D'ha vonn (*bis*)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Honn enebourien miliguet
Enn ho c'halon tann ann Ivern,
Ha zeu warnomp kenn kounnaret
Ag ar marc'h paour ha zac'h err spern. (*bis*)
A war zu aman pa zeuont,
Enn eur laza bihan ha braz,
Greomp deze kavet ho c'hlaz,
Pe dec'hell kuid kargued ha spont.

Kemeromp ann armou
A zouge hor zadou
D'ha vonn (*bis*)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Hoguen, arabat ezeo skei
Nemet ha rhe hara demp poan,
Ne lazomp kenn nemet ar blei
Rak hennez eo ankou ann oan. (*bis*)
Hennez gleomp dizalbenna,
Evidomp ezeo eb truez,
Evel-ze tro pad hor buez
Lakomp anezhan d'ha grena.

Kemeromp ann armou
A zouge hor zadou

D'ha vonn (*bis*)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Hor baniel, bugale Arvor,
Ha gleomp atao d'ha zougwen,
Hi ezeo baniel ann henor,
Sellit, evel ann erc'h eo gwen. (*bis*)
Ha be vech ma ve displegwed
Ann enebonrien ha veler
Vel bleun, pa zeu ar goal amzer,
Ho plega ho fennou mantred.

Kemeromp ann armou
A zouge hor zadou
D'ha vonn (*bis*)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Enn keita ma vomp enn buez
Hor diskaromp eb kavet aon,
Arabat eo kavet truez,
Ho hastennomp war ar valskaon. (*bis*)
Sellit Kounann Meriadek,
A zao hirio demeuz he ve
Enn eur lavarad demp ive :
— « Dallit va c'hlesc galloudek ! »

Kemeromp an armou
A zouge hor zadou,
D'ha vonn (*bis*)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Demeuz he ve a zao Guesklen,
A war he gleze ha lenner :
— « Henor d'ha Vreiz, ha tor he benn
» D'ha c'henebour, guir marc'henner ! » (*bis*)
Ag enn eur zavel ha lavar :
« Redit, reedit d'ar vrezel holl,

« A diskarit ann dud diroll
« A c'houzant, gant poan, ann douar!

Kemeromp an armou
A zouge hor zadou,
D'ha vonn (*bis*)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Klevit tud Breiz, Marzin, Arzur,
Daou zen demeuz ann amzer all,
Ho lavarad de oc'h adrazur :

— « Tennit, tennit ar griou fall. • (*bis*)
Ia, ho zennit he-ta buhan,
Araog ma zeuio ann devez
Ma renkfoe'h anzae eun divez
Evit atao bras ha bihan.

Kemeromp ann armou
A zouge hor zadou,
D'ha vonn (*bis*)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Guelit ann envou zo tannet,
Ar labousset chom eb kana,
Ag enn douriou zao ar rannet,
Ne reont ken nemet krena. (*bis*)
Allaz ! holl grenonn eb paouez,
Guelit, ho fennou ha blegont,
Keita ma zo tud divergont
Ho klask atao mouga hor mouez.

Kemeromp ann armou
A zouge hor zadou,
D'ha vonn (*bis*)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Klevit, klevit ar c'hanolliou,
Ne reont ken nemet strakall,

Keita ma c'halv ann drompilliou,
Deuz ann daou du, d'ar gann, re-all. (bis)
Evel-ze diskuelomp deze
Ezomp-ni bugale d'ha Vreiz,
Ar vro elec'h ma gaver feiz,
Douzanz Doue ha karante.

Kemeromp ann armou
A zouge hor zadou,
D'ha vonn (bis)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Diskuelomp garromp hor frankiz,
Ha kement tra ra vad ann den,
Pa vomp, tud koz ha iaouankiz,
Enn eur ganna war ar blenen. (bis)
Rak inn mar galfenn hor lakad
D'ha gouskad enn ho liammou,
Bugale, tadou ha mammou,
Ha chomfemp enn he d'ha gouskad.

Kemeromp ann armou
A zouge hor zadou,
D'ha vonn (bis)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Ia, diskuelomp ouzomp mervel
Evit difenn atao hor bro,
Hor bro goz anvet Breiz-Izell,
Breiz-Izell, douar ann dero. (bis)
Evel-ze anezi karromp
Enn keita ma vomp enn buez,
Hi, zo eur vam leun ha druez
Ag evit-hi nimp holl marvomp!

Kemeromp ann armou
A zouge hor zadou,
D'ha vonn (bis)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

AR GONID KENTA

Ur c'hezlo mad a zo digwet :
Ar Fransijenn ho deûz trec'het !
Ar Prussianed divergont
Ho deûz dornet, pell, pell du-hont !

Leuskomp ur iouc'hadenn, potred :
Ra vevo Franz ha Breiz bepred !

Bezomp laouenn, c'hoarzomp, kanomp ;
D'ar re a emgann ewidomp
Iec'hed, meulodi hag enor,
Potred Bro-C'hall ha re Arvor !

Leuskomp ur iouac'hadenn, potred :
Ra vevo Franz ha Breiz bepred !

Evomp ur banne d'ho iec'hed,
Ha na veomp pelloc'h nec'het ;
Netra , netra na bâdo pell
Eneb tud Franz ha Breiz-Izell !

Leuskomp ur iouc'hadenn, potred :
Ra vevo Franz ha Breiz bepred !

N'ho deûz skoët met un tol c'hoaz ;
Met pa deuio ann dervez bras,
Ah ! waleur d'ann enebourien
Ho deûz hor galwet en dachenn !

Leuskomp ur iouc'hadenn, potred :
Ra vevo Franz ha Breiz bepred !

Neuze 'skofont 'vel ar c'hurun,
Hag a lakafont en bruzun
Ann dut-fall, ann dut divergont ;
Ha goude gonid a lârfont :

Leuskomp ur iouc'hadenn, potred :
Ra vevo Franz ha Breiz bepred !

— « D'ann dud hep enor hag hep feiz
« Ar Fransijenn ha potred Breiz
« A raio bepred ar brezel,
« Hep truez, ha bete mervel.

Leuskomp ur iouc'hadenn, potred :
Ra vevo Franz ha Breiz bepred !

« Na skoomp nemet pa ve rùd,
« Ha gant ur glac'har vraz bepred ;
« Met an drubarded, ar re-fall,
« Krenet dirag tud Breiz ha Gall ! » —

Leuskomp ur iouc'hadenn, potred !
Ra vevo Franz ha Breiz bepred !

Kanomp brema 'ta, mignoned,
P'ho deüz gant graz Doue trec'het ;
Ha pedomp iwe 'wit d'ho bro
Ho gwelfomp hep-dale distro ! —

Leuskomp ur iouc'hadenn, potred :
Ra vevo Franz ha Breiz bepred ! —

Fanch AR MOAL.

Ann dri a viz Eost 1870.